

Ar beleitejn harluet. (1)

War ton Communio ar vugale. (f° 124)

1

O ma Doue pa deuan da sonjal
 Me sant va c'halon e straqal
 Ag e dont da gonsideri
 Ar malheur a zo oc'h or pressi.

2.

Me vel e nem den deus or c'hreis
 Ar gwir sklerijen deus ar Feis
 Squis e Doue oc'h or goelet
 Pa na renonsomp d'or pec'het.

3.

Kaer an deus dont d'or gerwel
 Ne reomp seblant wid e c'hlevet
 Ag o skois a dra centen
 Meurbet terrubl gant he walen.

4.

Brassa malheur a c'heruffe
 Eo an ambandon a Zoue
 Tarc'homp mad et ta d'or lezen
 A greomp timad gwir finijen.

5

En em adressomp d'ar Ver'hez
 Pini eo ar gwir advocatez
 D'ar bec'herien ambandonnet
 Etre daouar[er] chimatiket.

6.

Doue a zeu en amser ma

(f° 125)

(1). - Pas de titre ; ce titre est celui qui se trouve à la table dressée par Penguern.

Eus e vinistriet d'or priva
 Be on eus se sur meritet,
 O vesa ounta ken direspet.

7.

Squis int pelloc'h o redet
 er c'hoajou noz deis eb kousket
 Souffret o deus naon a riou
 An douar ien evit queleou.

8.

Evel int ouz ar gaouen
 A gus en deis e nos a bourmen
 Preserviti an evel laboucet
 Allas ar gues a renq cuset.

9.

Pel so emeint e miser
 Palamour deomni va Salver
 Or punissit o va Doue
 A do beleien liberte.

10.

Ne deo ket-hi o deus meritet
 Beza er c'his se chatiet
 Allas ni a so criminal
 En dallentes meurbet fatal.

11.

Sonjet o deus ivit o repos
 En em denna e bro Saos,
 Alies o deus bet clevet
 E vije ar feis dezgo rentet.

12.

Va daoulagat a scuil daelou
 Va c'halon a bouto huanadou
 Plijet ennoc'h va Doue
 O ped truez oc'h on ene

13.

Adieu eta or Beleien,

290

Marteze no quellimp biquen.
 Mervel a rankimp evel loanet
 Eb sakramant na sicour ebet.

14.

Quel e ganeomp certenammant
 Mervel eb reço sakramant
 Evid na deo beza souillet
 Dre saouarn an heretiket.

15.

Kris e vije ar galon na vouelje
 E treis an Aber neb a vije
 O velet ministret Jesus
 Taolet var er mor perillus.

16.

Kunduit al lestric se va Doue
 A liquint-en e savete
 Beza ezint o quir disquibien
 Preserviti dre o moyen.

(f° 127)

17.

Adieu eta quir bastoret
 Ni zo eta abandoumet
 Etre grifou bleizi mechant
 Privet a beb soulajamant.

18.

Ma vijen eno var garrec
 Doue en divije va exaocet
 Crial a rajen certenammant
 Ma saje ar encleo d'ar firmamant.

19.

Ta va Doue ni oc'h eullio
 A var o letrje'h ni a grio.
 Importun evel ar gananeen
 Quen a rot deomp or beleien.

20.

Ar veleien ive do gro

291

A zisques o glac'har c'huero.
 Merquet eo var o bizachou
 E seullont cals eus a zaelou.

(f° 128)

21.

Adieu pobl queis eus a Leon.
 Quitaat a rankomp or c'hanton
 Adieu kerent a mignonet
 Adieu d'or quir penitanted.

22.

Lezet on eus ganeoc'h armou
 Evit souten och eneo;
 Diouallit mad eta pobl queis
 A dalc'hit mad atao d'ar feis.

23.

O va Doue pebes arret
 Or beleien a renq tec'het
 Ni non eus mui d'or souten
 Nemet o kras va Salver eb quen.

24.

Ar gatelet ⁽¹⁾ eus va c'haloun
 An dioprising eus ar gracou
 E Doue quement outrajet
 Ma zeo ourzomp en em fachtet.

25.

Pardon va Doue va Jesus
 Bezit ourzomp trugaresus
 C'hui a zo deom - ni efin tad mad
 En oc'h andret ni so ingrat.

(f° 129)

26.

O ministret eus on Doue,
 Pedit evidomp nos a dee,
 Ma tuimp d'en eur amanti
 O tec'het diout an heresi.

(1). - Ms.: gatelet; lire: galetet.

292

27.

O quere'hes Vari on itroun
 Sellit out on dezolation
 Sellit a drues oud ar Franç
 A roït deomp oc'h assistanç.

28.

Na brema petra da ober.
 Ni non eus mui ar pouer
 Da ober en public pedennou
 Pe brest e zäimp d'ar prisonniou.

29.

Decretet eo gant an nation
 Eo criminal an devotion:
 E cus evel ar gouen
 E rencomp ober or peden.

30.

Pelec'h e zäimp-ni da bedi
 En ilis n'ellomp antren mui
 E c'hars ar groas da viana
 Gant ar Vadalen da vouela.

31.

Evel ar benitantet quechal
 E c'hars an doriou o crial
 Eb gallout en ilis antren
 Nemet goude quir binijen.

32.

Brema e zäimp ive condaonet
 Da vouela dourec d'or pec'het
 Biquen ne antreomp en ilisou
 Ma na renoncomp d'or c'krimou.

33.

Pe queit va Doue a amzer
 E t'lessot-hu ar pec'her.
 Dizec'ha a reomp evel ar foën

(f° 130)

293

Ma na zuit pelloc'h d'or souten.

34.

Grit ma verzo retablisset
 Ar Jerusalem distrujet
 Ma c'hellimp antren en ilisou
 Da gana deoc'h meuleudiou.

—
 Doue verzo meulet,
 Hag an anaoun pardonnet.

7

Fait par M. Le Borgne, mort vicair de Cléder.
 Copié sur le manuscrit original, appartenant à
 Pierre Le Borgne, son neveu. Taulé, 5 mars 1851.